

Au fol^o 174 recto, seulement le titre :

(174 recto)

Renean Glas.

[rien aux f^{os} 174 verso et 175 recto.]

(175 verso)

Renean glas.

Na Renean glas a choulenne
En ti e zad eun de a we :

— Pera zo a neve en ti man
ma medi 'r berr deus tan kenan.

Ma medi er berr deus an tan
Ar pôt-ouern bras hag n' hini bian

Ar pôt-ouern bras hag n' hini bian
Ne roant i Ked Kustum da vean.

— Va merc'h euz tra vras e ho klevet,
A bean varc'hoas de ho c'heuret.

— Ma man varc'hoas de ma c'heuret
Divera ma buhe o c'h eus groet.

(176 verso)

— Tervet, Renean, na welet Ked
Rak eun den a feson o c'heus bed.

Ar perc'heg d'an arc'hant a d'an aour,
Gant e gile e vicher'h paour.

— A pa ven gantan o Klask ma vouet
Se n' rache man da den e bed.

98

Ma vichen e lech ma diziran
N' vichen ked aman o vevan.

En Kverder gant er mab henan
So ma muan Karet er bed man.

Ma muan Karet war le~~le~~ch Doue
Hag e vo ken ma vin en buhe..

Ma Renean glas a lavare
N' prenest he c'hamb gwen a pa selle:

(177 verso)

— Me wel hari er Kumpagnunez
Hag i e tond en Koat bara lez.

Arri int Kant en eur vanden
Hag Erwan Gelard o c'habiten

Erwan Gelard o c'habiten
Me we dewet ken ne charen.

me vo ma mallos a galon vad
Ken Koulez d'em mam evel dam zad

A d'an eb a neus bugale
No lezont da choas ho bolante.

A d'an eb a n'eus tud isouank
n'ho lezont da choas ho sentiment (1).

(178 verso)

—
Dalet matorzek al liser man
It tu da Kverder gantan.

It tu da Kverder gantan
Reid an nean d'ar mab henan.

—
Ar vates vian a c'houlenne
En Kverder pa c'h arvie:

(1).— D'abord : sentiment ; l'e est corrigé en a : e.

— De mad a joa oll en ti man
Ar mab heran, pa ne velan?

179 verso)

— Para o c'heus d'ober a nean,
P'e dimeet he douçif Renean.

— Wid bea he douç dimeet
C'hoant moa e deuche d'an euret.

— Salokras marteze n'ai Ket,
Ne man Ked en Stad da voned.

È man diwar he wele klan
Matez vian Konsolit-an.

—
Ar matès bihan a lavare
È bars er gamb pa entree:

— Talet mab heran al lizer man
Zo digant o douç koant Renean.

180 verso)

Ne wa Ked al lizer dioret mad
Ne wa ?n dour war he zaou lagad.

— Ma ne deus Ket tri de da vevan
Me meus neubentoc'h a Kredan.

—
Ma Renean glas a Choulenne
Deus he vates vian an de se:

— Al lizer p'an neus bed lennet
Pera a newe e neus laret?

— Ma n'o c'h eus Ked tri de da vevan
En e neus neubentoc'h a mean.

181 verso)

—
Nag Erwoan Zelard a Choulenne
N'i ti Renean glas pa entree:

— Diboujour a joa oll en ti man
Pelec'h e man ma douz Renean?

— E man n' he Kamb wen en pen an ti
Erwan Gelard Konsolet - i.

— Na demat dec'h Renean Koant!
— Na dec'h, emei, intaon iaouank!

— Na Renean dir e leret
E lec'h intaon em c'hemeret?

— En lec'h intaon n'ho c'homeran Ked
Med ne vo Ked pell na ne veet.

Merc'het awalach wa er c'hontre
Eb eureujin re all en espet de,

(182 verso)

Eb eureujin re all en espet de
Wid ar plijadur pro gante.

Erwan Gelard ma nem c'heret
Grit eun hed vad nag em andret

Grit eun hed vad nag em andret
Da dremen Kiverder ma mouchet.

Ma mouchet da tremen Kiverder
Pe na deuin en buhe d'er ger.

—
Renean glas a lavare
N' ti he mam Kaer pa arvie :

— Roed din gadeur d'a arzean
Ma mam gaer Skwis bras n'em gaver.

(183 verso)

— Renean, ganech e c'hon souezet
War gein 'n marc'h mad he warch douget!

— Me ve deud essorc'h war ma groad
Ma vijen me deud a galon vad.

Renean glas a lavare
Deus dol he c'heuret an de se :

— Debet hag evet ma zud kez
Achet e perc'hen an dewez.

Debet hag evet groet cher vad
Evidon, ne c'hallan mui mad. (1)

(184 verso)

Me kleo 7r kleier sonn glas tanno
D'am muan karet a zo maro.

Me kleo ar kleier e son ar glas
Maro e ma charante siwas!

Nag a ben diver a hirie
E vont ie o sonn dime.

Ne voa ked he gir peur achuet
E c'halon dre n'antèr zo rannet.

—
Et medint o taou war ar varskaon
Doue Pardonno d'an anaon!

—
)

[pas de trad. franç.]

(1) — Le ms. a : mad. Je crois qu'il faudrait trad. résister, durer.